

VI. 48

AVIEL NEDELEK

Hag an daou vugel

War don : *Petra zo henoaz a neve ?*

En-pad an driwec'hved kantved,
Eun tiad, Kerdampred hanvet,
Enn-an tud a ⁷doujans Doue,
En-kichen Kastel a veve.

Unek a vugale oa bet,
Mes holl 'met daou e oant marvet :
Eur pôtrik nao bla : Morvanik,
Hag Eodez⁷ yaouankoc'hik.

O-daou, ar gwellan ma c'hellent,
'Reent plijadur d'o c'herent ;
Ewit-e bean yaouank c'hoaz,
O-daou dija oant ^{devot}deol braz.

Pa oe tostik gouel Nedelek
An daou vugel a oe c'hoantek
Da c'hellout, 'lec'h mont da repos,
Klevet Ofern an hanter-noz.

« P'e gwir oc'h bet zentuz ha fur,
« Eme ar vamm, gant plijadur
« C'houi vo lezet da vont henoaz
« D'an ofis-noz gant ar re vraz. »

Sethu, er ger, dastumet koan ;
Sethu an holl en dro d'an tan.
Kef Nedelek, ar c'hef laouen,
A ro tomder ha sklerijen.

Neuze, da c'hortoz an Ofiz,
En em laker, herve ar c'hiz,
Da ganan gwerzio dudiuz
En enor d'ar Mabik Jezuz.

Ar vugale a oa ^{sk}koachet
O-daou en kornik an oaled ;
Ha, daoust ma oa ken diwead,
Oa digor mad o daoulagad.

En korn an oaled e oa brao
Bean o chilaou Noello ;
Er-maez, ne oa ket brao avad
Gant an erc'h a gouee dalc'h-mad.

An avel ive a oa kri,
O strakal a bep tu d'an ti ;
Ne ehane tamm da yudal
En norio hag er ziminal.

Goude eur pennadik amzer
Laket da ganan gwerzio kaer,
Ar vamm a digor he armel
Da glask eul levr : an Aviel.

Hi neuze, frèz ha war he fouez,
A lennaz istor an nozvez
Ma teuaz Mab Doue er bed,
Gant ar Werc'hez Vari ganet.

Sethu, hep dale, Morvanik
O tifronkal en e gornik.
« Perak eta, eme e dad,
« 'Teuz daero en da zaoulagad ? »

— « Me, emean, me 'm euz true,
« Pa zonjan er Bugelik-se,
« Aman 'zo tan skler en oaled,
« E kraou Betleem ne oa ket ! »

— « Chilaou, ma mab, eme an tad :
« Ma kerez bevan en stad vad,
« Da garante, evel an tan,
« A dommo ar Mabik bihan. »

Neuze ar vamm a stag da lenn
Euz an istor an eil loden ;
Achu gant-i ne oa ket c'hoaz
He merc'h o ouelan pa glevaz.

— « Perak 'ta ive e ouelez ?
« Eme ar vamm da Eodez.
— « Siouaz ! emei, na poaniuz,
« E oa stad ar Mabik Jezuz ! »

« Ma c'halon baour a zo frailhet,
« Pa zonjan 'n e Vamm vinniget.
« Aman eo brao : kloz eo an nor,
« Mes kraou Betleem oa digor ! »

— « Ma merc'h, a respontaz ar vamm,
« Ma telc'hez da galon divlamm,
« Eno Mari d'he Mab Jezuz
« A gavo eul lec'h dudiuz...

« Mes, klevet 'ran o son ar c'hloc'h ;
« Arabad eo dale pelloc'h.
« Demp d'an iliz, demp holl gant fe
« D'azeuli Jezuz, Mab Doue. »